



KELENN BREZHONEG
D'AN OADOURIEN
BILAÑS DISTRO-SKOL 2008

Pol Studi ha Diorren
Arsellva ar brezhoneg
Genver 2009

Hentenn labour

Kaset eo bet an enklask da benn etre an 23/10/08 hag an 28/11/08 war an niver a oadourien enskrivet er c'hentelioù sizhuniek (bloavezh 2008/2009) hag an niver a stajidi (prantad Gwengolo 2007-Gwengolo 2008). Da gentañ eo bet goulennataet ar 180 framm dre bostel pe dre lizher. Pellgomzet ez eus bet d'an holl frammoù n'o doa ket respontet. 88% eus ar frammoù o deus respontet d'an enklask. Brasjedet hon eus an niver a dud enskrivet er c'hentelioù brezhoneg evit ar frammoù n'o deus ket kaset o respont a-benn embann roadennoù hollek war ar c'helenn brezhoneg d'an oadourien. Klokoc'h-klokañ eo an niveridigezh-se a-vloaz da vloaz a-drugarez da feur ar respontoù a zo uheloc'h bremañ.

SIFROÙ PENNAÑ


- **4 880 den deuet¹ o deus heuliet kentelioù brezhoneg e-kerzh ar bloavezh 2008 dre gentelioù sizhuniek, dre stajoù pe dre lizher, da lavaret eo +6 % e-keñver 2007.**
- **3 400 oadour a heuilh kentelioù sizhuniek** er bloaz 2008/2009 : renablet hon eus 3 174 deskard er c'hentelioù noz ha 227 er c'hentelioù kinniget d'ar c'hopriddi war o amzer labour.
- **Mat-kenañ eo kresk an distro-skol-mañ** evit an dud deuet enskrivet er c'hentelioù noz : +9,8% e live an deraouidi ha +6% en holl liveoù mesket. Eilpennet eo bet emdroadur ar sifroù e-keñver tuadur ar bloavezhioù tremenet. Kresket eo an niver a zeskidi evit ar wezh kentañ goude 10 vloaz digresk da-heul.
- **Roazhon** a chom ar gumun ma kaver **ar muiañ a oadourien** o teskiñ brezhoneg gant 193 skoliad er c'hentelioù noz ha **Naoned an eil**.
- Tost **an hanter** eus an dud enskrivet er c'hentelioù noz a zesk brezhoneg e **Penn-ar-Bed**.
- **Bro Vrest** eo ar vro a vod **ar muiañ a dud** o teskiñ brezhoneg dre ar **c'hentelioù noz** : 623 deskard er c'hentelioù noz. Sac'het eo an niver a dud o teskiñ er vro-se avat.
- E **bro Gerne** eo aet an niver a zeskidi ar muiañ **war greskiñ** en distro-skol-mañ : 124 skoliad ouzhpenn, da lavaret eo +37%. Daougementet eo bet an niver a zeraouidi er vro-se e-keñver distro-skol 2007 a-drugarez al lec'hioù nevez digoret er vro gant Mervent.
- **Brest Meurgêr ar Mor** eo ar framm etrekumunel ma'z eus ar muiañ a dud o teskiñ brezhoneg. Ledan eo ar c'hinnig kentelioù : kentelioù brezhoneg a ginniger e holl gumunioù ar gumuniezh-kêr-se war bouez Boc'harzh.
- E **Penn-ar-Bed** eo kresket ar muiañ an niver a zeskidi el live 1 : **+30% da live an deraouidi**. Mat eo bet an distro-skol en Aodoù-an-Arvor ivez : kresket eo eus 15% an niver a dud enskrivet er c'hentelioù noz an holl liveoù bodet.
- Gallout a reer heuliañ kentelioù noz e **178 lec'h e Breizh** e 2008/2009 (180 e 2007/2008).
- Dasparzhet eo al lec'hioù-se e **156 kumun** da lavaret eo ouzhpenn **10% eus kumunioù Breizh** (153 e 2007/2008). Un tamm nebeutoc'h a lec'hioù kelenn zo en distro-skol-mañ gant un digresk bihan met dasparzhet e muioc'h a gumunioù.
- **War-dro 20 lec'h** nevez zo bet digoret ar bloaz-mañ, an hanter anezho e Penn-ar-Bed (a-drugarez da striv Mervent)
- **Ur rummad nevez** a zeu mat war wel en distro-skol-mañ : ar c'hopriddi a heuilh kentelioù sizhuniek war o amzer labour ha war o lec'h labour.
- **1 138 stajiad** zo bet e-kerzh ar bloavezh 2007/2008 : an darn vrasañ anezho o deus heuliet stajoù ur sizhunvezh. Un digresk a zo e-keñver 2006/2007 (-8%).
- Bro Vrest eo ar vro ma vez stummet ar muiañ a dud dre ar stajoù a-drugarez da lec'hiadur Stumdi.
- **350 den** a zesk gant **kentelioù dre lizher**.
- Tost da 250 kelenner a ra war dro ar c'heleñn brezhoneg d'an oadourien. An hanter anezho zo a-youl-vat.

¹ Un den a c'hall bezañ bet jedet meur a wech en hollad-se (un den a c'hall heuliañ kentelioù noz ha stajoù e-kerzh ar memes bloavezh da skouer).

KENTELIOÙ NOZ : LAÑS GANT AN ENSKRIVADURIOÙ E DISTRO-SKOL 2008

AR C'HINNIG KENTELIOÙ NOZ

Pelec'h emañ al lec'hioù deskiñ- bloavezh 2008/2009




178 lec'h deskiñ zo en distro-skol-mañ dasparzhet e 156 kumun.

Penn-ar-Bed a chom an departamant m'eo an aesañ deskiñ brezhoneg. Digoret eo bet an hanter eus al lec'hioù nevez en departamant-se hag e bro Gerne dreist-holl. Disoc'h labour Mervent eo peurgetket hag a glask diorren he rouedad en ur zigeriñ lec'hioù nevez.

Krouet ez eus bet ivez kentelioù e lec'hioù ne oa kinnig ebet ken evel e Gwitreg pe e Pempont met ivez e Mur hag er Gemene pe c'hoazh e Saveneg el Liger-Atlantel. Takadoù bras eus ar vro a chom goullou c'hoazh koulskoude : reter Aodoù-an-Arvor da skouer, norzh al Liger-Atlantel hag Il-ha-Gwilen. Kempouesoc'h eo diorren ar c'hinnig war tiriad ar Mor-Bihan eget war hini Aodoù-an-Arvor m'eo kreizennet ar c'hinnig e Gwalarn an departamant (e Treger). N'eus kentel brezhoneg ebet war-hed ar 60 km etre Sant-Brieg ha Dinan da skouer.


Tennañ a ra kartenn ar c'hentelioù brezhoneg kinniget d'an dud deuet da hini ar c'helenn divyezhek er skolioù. Ledanoc'h eo ar c'hinnig d'an oadourien met e-lec'h ma vez ul lec'h divyezhek e vez kentelioù brezhoneg kinniget d'an dud deuet. Stag eo diorren ar c'helenn d'an dud deuet ouzh kresk al lec'hioù ma kinniger skolioù divyezhek.

Dregantad ar c'humunioù a zegemer kentelioù noz -distro-skol 2008



Gallout a reer heuliañ kentelioù noz e ouzhpenn 10% eus kumunioù Breizh. Daou zepartamant zo en tu all d'ar geidenn-se : Penn-ar-Bed n'emañ ket pell eus ur c'hard eus ar c'humunioù gant kentelioù brezhoneg hag ar Mor-Bihan a zo un tammig a-us d'ar geidenn hepken. Dont a ra war wel an diouer a ginnig en Aodoù-an-Arvor : pourvezet mat ez eus ul lodenn eus an departamant (Treger) p'eo treut e peurrest an departamant an niver a lec'hioù deskiñ. Frammet eo ar c'hinnig kentelioù noz er vro-se gant al labour kaset da benn gant Al Levrig. Tachenn labour ar framm-se a chom Bro Dreger. A-bouez eo perzh ar framm-se er c'helenn d'an oadourien en Aodoù-an-Arvor : an hanter eus skolidi an departamant a gemer kentelioù kinniget gantañ.

Emdroadur an niver a lec'hioù deskiñ etre 1998 ha 2008




Stabil a-walc'h eo chomet an niver a gentelioù noz e-keñver distro-skol 2007 : digoret ez eus bet lec'hioù nevez met n'eus ket bet kinniget kentelioù en-dro e kumunioù zo en distro-skol-mañ kennebeut. Kalz niverusoc'h eo an niver a lec'hioù deskiñ e 2008 evit dek vloaz zo : tost 50 lec'h ouzhpenn zo e 2008 eget e 1998. El Liger-Atlantel hag er Mor-Bihan ez eus bet krouet ar muiañ a gentelioù noz en dek vloaz diwezhañ. Kresket eo kalz an niver a lec'hioù deskiñ etre 1999 ha 2002 a-drugarez da stignad an implijoù yaouank. Deuet eo a-benn ar frammoù da virout al lec'hioù a oa bet digoret e-pad ar prantad diorren-se. Klotañ a ra harz kresk an niver a lec'hiadoù gant termen ar stignad-se.

Ar c'hinnig kentelioù e-maez Breizh

Renabet hon eus 33 lec'h deskiñ e maez Breizh. Un drederenn eus al lec'hioù-se zo e Pariz ha Bro Bariz. Bep bloaz e tizoloomp lec'hioù nevez. Er broioù all e vez dedennet an dud gant ar brezhoneg ivez eus Toronto betek Shanghai : renabet hon eus 17 lec'h a ginnig kentelioù brezhoneg e-maez Frañs (an darn vrasañ anezho zo skolioù-meur.


Kentelioù e skolioù-meur pe gant kevredigezhioù



AR GOULENN : KRESKIÑ A RA AN NIVER A DUD A ZESK DRE GENTELIOÙ NOZ

EMDROADUR AN NIVER A ZESKIDI : KREGIÑ A RA DA GRESKIÑ DA VAT GOUDE MEUR A VLOAVEZH DIGRESK

Grafik emdroadur an niver a oadourien er c'hentelioù noz e Breizh etre 1999 ha 2008



Lakaet ez eus bet un harz d'an digresk a skolidi zo bet e-kerzh an dek vloaz diwezhañ. War stabilaat e oa aet an niver a zeskididi etre 2005 ha 2007 gant ur c'hresk el liveoù kentañ e 2007 zoken. **Splann eo ar c'hresk en distro-skol-mañ e Breizh.**

Niver a zeskidi er c'hentelioù noz dre zepartamant ha dre live-Bloavezh 2008/2009²

Dep.	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5&+	4 lamm	2 lamm	Hollad	Kresk kriz	Kresk
Penn-ar-Bed	545	295	172	149	217	13	10	1401	139	
Mor-Bihan	220	120	81	61	93		3	578	26	
Aodoù-an-Arvor	190	129	84	81	70			554	72	
Liger-Atlantel	121	74	94	29	26			344	-52	
Il-ha-Gwilen	112	64	55	30	32	3		296	-15	
BREIZH	1188	682	486	350	438	16	13	3173	170	
Kresk kriz	106	-41	-88	32	131			169		
Kresk bloaziek e %	9,8%	-5,67%	-15,33%	10%	42%			6%		

2007/2008	1082	723	574		625			3 004		
2006/2007	1018	670	569		773			3 030		

■ Sifroù war gresk ■ Sifroù war zigresk ■ sifroù stabil


Kresket kalzik eo an niver a zeskidi er c'hentelioù noz e distro-skol 2008 : mat-kenañ eo kresk an distro-skol-mañ e-keñver an emdroadur zo bet e bed ar c'helenn brezhoneg d'an oadourien e-kerzh an 10 vloaz diwezhañ zoken.

E Penn-ar-Bed hag el liveoù uhelañ (live 5&+) ez eus bet ar muiañ a dud ouzhpenn er c'hentelioù noz e-keñver 2007. Kresket kalz eo an niver a dud deuet enskrivet e live an deraouidi ivez. Padal ez eus un digresk bihan el live 2 ha brasoc'h el live 3 : priz ar bloavezhioù « du » eo bet an emdroadur-se er bloavezhioù diwezhañ.

Lusk zo en Aodoù-an-Arvor en-dro. Mat eo bet an distro-skol en departamant-se : kreskiñ a ra an niver a zeskidi eus 15% (kresk brasañ e dregantad). War an hent emañ an departamant-mañ da adtadpout an dale e-keñver ar Mor-Bihan. Aet eo Al Levrig, ar framm hag a vod an hanter eus deskididi an departamant, war vicherelaat ha war emframmañ. N'eo ket bet kenkoulz an distro-skol el Liger-Atlantel avat : un digresk zo bet el liveoù kentañ pa n'eus ket bet kinniget en-dro kentelioù e kornôg an departamant da skouer. Gant digresk brasañ DFKoù³ Breizh emañ kumuniezh kêr Naoned (-40 skoliad hag un digresk el liveoù kentañ dreist-holl). N'eo ket en em gavet ar c'hresk e departamant Il-ha-Gwilen c'hoazh. Tizhet eo bet ar memes niver a zeskidi evit an distro-skol 2007 memes tra.

Ur c'hresk bras zo bet el liveoù uhelañ. Un tuadur mat evit ar c'helenn d'an oadourien hag a zeu a-benn da stummañ brezhonegerien ampart gant al liveoù uhelañ-se (live 5 ha muic'h). Reiñ a reont an tu d'an deskididi da wellaat o live brezhoneg dre atelieroù c'hoariva da skouer.

Emdroadur an niver a dud e kentelioù noz dre live etre 1999 ha 2008



Stabilaet e oa bet an digresk an niver a zeskidi e 2006 c'hoazh. Mont a ra an niver a dud deuet enskrivet er c'hentelioù-se war greskiñ dibaoe. Gant ur c'hresk bras emeur en


² Stummadurioù 4 lamm a dalvez 6 eurvezh ar sizhun hag ar stummadur 2 lamm a dalvez 3 eurvezh ar sizhun (lakaet e pleustr gant Mervent ha Skol an Emsav).

³ diazezadur foran a genlabour etrekumunel

distro-skol-mañ zoken evit ar re a laka o anv evit ar wech kentañ : +9,8% e-keñver 2007. Eus Penn-ar-Bed e teu an darn vrasañ eus an deraouidi nevez-se. Kresket eo eus 28% al live kentañ e Penn-ar-Bed.

Kresket kalzik eo al liveoù uhelañ (live 4 &+) en distro-skol-mañ, ar pezh a gadarna an emdroadur bet er bloavezhioù diwezhañ. Daougementet eo bet an niver a zeskidi el liveoù-se en Aodoù-an-Arvor zoken ha kresket eo eus 65 % er Mor-Bihan peogwir ez eus bet digoret atalieroù a-benn gwellaat live yezh ar skolidi. Muioc'h a skolidi zo el live 4 hag el liveoù uheloc'h eget el live 2 abaoe an distro-skol-mañ.


Emdroadur an niver a dud e c'hentelioù noz dre zepartamant etre 1999 ha 2008



E Penn-ar-Bed emañ ar c'hresk en e splannañ en distro-skol-mañ a-drugarez d'al lamm el live 1 da skouer. Kroget eo da greskiñ en-dro en Aodoù-an-Arvor abaoe 2005 c'hoazh. A-live gant ar Mor-Bihan emañ bremañ. Un digresk zo el Liger-Atlantel goude daou vloaz kresk koulskoude. Muioc'h a zeskidi zo en departamant-se eget en Il-ha-Gwilen memes tra c'hoazh en distro-skol-mañ. War stabilaat ez a stad an traoù en Il-ha-Gwilen : bihanoc'h-bihanañ eo an digresk.

PET DEN A ZESK BREZHONEG HA PELEC'H


Dasparzh an niver a dud er c'hentelioù noz dre zepartamant-distro-skol 2008



Tost an hanter eus an oadourien a zesk brezhoneg dre ar c'hentelioù noz zo e Penn-ar-Bed. Aet eo pouez Penn-ar-Bed war greskiñ e-keñver dasparzh ar skolidi er c'hentelioù noz evit ar bloavezh 2007/2008 zoken. Kadarnaet eo ar fed ez eus muioc'h a oadourien a zesk brezhoneg el Liger-Atlantel eget en Il-ha-Gwilen en distro-skol-mañ.

Dasparzh an oadourien a zesk brezhoneg zo tost da hini ar skolidi divyezhek : adkavout a reer dreistpouez Penn-ar-Bed da skouer. N'eus nemet ar Mor-Bihan zo gant ur stad disheñvel. N'eo ket ken bras e bouez er c'heleñn d'an oadourien hag e hini er c'heleñn divyezhek. Un diouer a rouedadoù kentelioù noz aozet gant frammoù micherel zo en departamant-se. Un ezhomm aozañ splann a zeu war wel en departamant-se.

Dasparzh an niver a dud er c'hentelioù noz dre vro-distru-skol 2008



Notenn : a-vent gant an niver a skolidi er vro eo pep kelc'h

Deskiñ a reer brezhoneg e tost holl vroioù Breizh da lavaret eo e 25 bro diwar an 29 zo e Breizh. Bro Witreg a zo e-touez ar broioù ma vez kinniget kentelioù noz abaoe an distro-skol-mañ. Ur c'hinnig kentelioù noz zo e holl vroioù Il-ha-Gwilen war-bouez hini Felger. Kentelioù brezhoneg a veze kinniget betek 2003 er vro-se. Aozet e veze ar c'hinnig gant ur framm eus Roazhon, Skol an Emsav. N'eus ket bet gallet kenderc'hel da ginnig kentelioù abalamour d'ar frejoù aozañ (re ger e oa evit ar framm kas ur c'heleñn betek Felger). Mankout a ra ur c'hinnig e teir bro eus al Liger-Atlantel. Bro Vrest eo ar vro a vod ar muiañ a dud o teskiñ brezhoneg dre ar c'hentelioù noz diwar skouer ar pezh a gaver er c'heleñn divyezhek (e-touez broioù pobletañ Breizh emañ bro Vrest (goude bro Naoned bro Roazhon). Ne'z a ket war an tu mat emdroadur an niver a skolidi e kumun pennañ ar vro koulskoude. Un digresk bihan zo e Brest zoken : -6 skoliad e keñver distro-skol 2007.

Gwelet a reer efedusted ar frammoù a genurzh ur rouedad kentelioù noz. Er broioù m'emaint staliet e kaver ar muiañ a skolidi. Er c'hontrol eo bihan pouez bro Kêr-Wened (9vet bro) pa'z eus lañs gant ar vro-se evit ar c'heleñn divyezhek koulskoude (an eil bro e-keñver an niver a skolidi divyezhek).

**Renkadur ar broioù diouzh an niver a dud er c'hentelioù noz
Bloavezh 2008/2009**

Bro	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5&+	4 lamm	2 lamm	Hollad	Emdroadur bloaziek
B.Vrest	221	151	109	61	81			623	-2
B.Gerne	208	59	36	49	91	13		456	124
B.Treger ha Goueloù	78	70	34	46	27			255	35
B.Vontroulez	81	64	22	37	36			240	16
B.Roazhon	73	48	56	21	24	3		225	-16
B.an Oriant	72	41	36	22	44		3	218	31
B.Kornôg Kreiz Breizh	74	44	20	23	19		10	190	49
B.Naoned	59	25	58	18	26			186	-30
B.Kêr Wened	71	40	22	4	15			152	1
B.Wengamp	52	23	16	21	18			130	-7
B. an Alre	39	18	11	23	12			103	-10
B.ar Briver	26	25	17	11				79	-37
B.Sant-Brieg	15	12	22		25			74	5
B.Raez Atlantel	21	11	11					43	9
B.Bondi	17	14		5	7			43	-16
B.Kreiz Liger-Atlantel	21	10						31	15
B.Sant-Maloù	7	8	5	9				29	0
B.Dinan	8	8	9					25	-6
B.Vreselien	14				8			22	7
B.Traoñiennoù ar Gwilen	7	7						14	4
B.Bloermael	9				5			14	0
B.Kreiz Breizh	10							10	1
B.Redon hag ar Gwilen	10							10	0
B. Gwiniegi Naoned			6					6	1
B.Witreg	3							3	3



Sifroù war gresk




Sifroù war zigresk



sifroù stabil

Kresket eo an niver a dud deuet a zesk brezhoneg pe ez eo stabilaet an niver-se e tost an tri c'hard eus ar broioù. E bro Gerne emañ ar c'hresk en e uhelañ : +144 skoliad ouzhpenn en distro-skol-mañ (+43%). Disoc'h youl diorren Mervent en distro-skol eo. Oc'h adaptout e zale e-keñver bro Vrest emañ bro Gerne. Ar vro eo ma kaver ar muiañ a zeskidi el liveoù uhelañ, da lavaret eo live 4 hag en tu all d'al live 5. **Lieskementet eo bet dre zaou an niver a zeraouidi er vro-se** e-keñver distro-skol 2007 a-drugarez al lec'hioù nevez digoret. Ur c'hresk bras (+35%) zo bet e bro Kornôg Kreiz-Breizh ivez. E-touez al liveoù kentañ eo aet war greskiñ dreist-holl a-drugarez al lec'hioù nevez digoret en distro-skol-mañ (er Gemene, e Mur, en Uhelgoad hag e Kastell-Nevez-ar-Faou). Mat eo bet an distro-skol-mañ e bro Treger ha Goueloù hag e bro an Oriant : +16% en div vro-se. Aet eo an daou live kentañ war greskiñ e bro an Oriant (+20%) p'eo al liveoù uhelañ zo aet war greskiñ e bro Treger ha Goueloù avat. Renk bro an Oriant (6vet) n'eo ket a-drugarez kerbenn ar vro avat met kumunioù an tolpad-kêr kentoc'h ha pouez kreizenn Amzer Nevez da skouer lec'hiet e Plañvour. Muioù a skolidi zo e bro Treger ha Goueloù eget e bro Roazhon abaoe an distro-skol-mañ.

Kartenn an niver a zeskidi dre ziazezadur foran a genlabour etrekumunel (DFKE)⁴



Pevar fol bras a zeu war wel : an daou framm etrekumunel hag a zo gant muioc'h eget 200 deskard (Brest Meurgêr ar Mor (235 skoliad) ha Meurgêr Roazhon nebell gant 225 skoliad), Kumuniezh-kêr Meurgêr Naoned ha KTK Bro an Oriant zo gant ar memes niver a zeskidi (186). E takadoù pobletañ Breizh e kaver ar muiañ a dud deuet a zesk brezhoneg, 10 DFKE diwar 71 gant kentelioù brezhoneg zo en tu all da 100 skoliad.

Lakaat a ra ar gartenn-se war wel al lec'hioù n'eus kinnig ebet ivez : kentelioù brezhoneg a ginniger en ur framm etrekumunel diwar zaou. Mankoù bras zo en un hanter eus Aodoù-an-Arvor e kreiz hag e reter ar Mor-Bihan. N'eus den ebet o teskiñ brezhoneg e reter an Oriant nag e su Pondi da skouer.

Renkadur an 20 framm etrekumunel kentañ diouzh an niver a dud er c'hentelioù noz - Bloavezh 2008/2009

Frammoù etrekumunel	Dep.	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5&+	4 lamm	2 lamm	Hollad	Emdroadur
1 Brest Meurgêr ar Mor	29	92	50	36	24	33			235	-31
2 Meurgêr Roazhon	35	72	49	50	21	24	3		219	-22
3 KTK Bro an Oriant	56	67	37	36	22	24			186	31
4 KK Meurgêr Naoned	44	53	28	60	18	26			185	-40
5 KK Plabenneg hag an Aberioù	29	46	32	39	20	20			157	60
6 KK Bro Gemperle	29	96	13	4	12	15			140	115
7 KTK Bro Kêr-Wened	56	63	29	16		15			123	4
8 Tolpad-kêrioù Bro Vontroulez	29	42	34	7	8	31			122	5
9 Tolpad-kêrioù Kemper	29	39	15	10	8	23	13		108	26
10 KTK Lannuon-Treger	22	46	25	15	14	5			105	33
11 KK Bro Landerne-Daoulaz	29	36	35	4	6	15			96	19
12 KK Pempoull ha Goueloù	22	25	29	16	14	5			89	19
13 KK Bro an Alre	56	25	18	11	23	12			89	-12
14 KK Bro An Hirwazh	29	37	22	21		5			85	-40
15 Tolpad-kêrioù Bro Sant-Brieg	22	15	12	22		25			74	24
16 KK Bro Landivizio	29	12	11	10	20				53	-11
17 KK Bro Leon	29	20	13	5	9	5			52	9
18 KK Bro Lannollon-Plouha	22	20	4	6	7	15			52	-20
19 KK Bro ar Roue Morvan	56	12	7	12	7	10			48	32
20 KK Kab Atlantel	44	18	16	7	7				48	-20


⁴ Ur sell dedennus ha disheñvel a zegas ar gartenn o keñveriañ an DFkoù kenetrezo. Kumunioù zo a c'hall desachañ deskidi o tont eus kumunioù all eus ar framm etrekumunel pe dilec'hiet e c'hall bezañ bet kentelioù e kumunioù e trowardroioù kêrbenn ar framm etrekumunel ivez diwar skouer kentelioù Naoned aet da Sant-Ervlan.

Brest Meurgêr ar Mor eo ar framm etrekumunel m'emañ an niverusañ an dud a zesk brezhoneg daoust d'un emdroadur fall en distro-skol diwezhañ : kentelioù a vez kinniget e holl gumunioù ar gumuniezh-kêr-se war bouez Boc'harzh. Ul lamm zo bet graet gant kumuniezh kumunioù Bro Gemperle en distro-skol-mañ. Tremenet eo eus 22^{vet} plas d'ar 6^{vet} : kalz a gentelioù zo bet digoret er gumuniezh-kumunioù-se (e Sant-Turian, e Kerien, e Tremeven, e Molan da skouer) ha 115 den a zesk brezhoneg ouzhpenn. Mat-kenañ eo bet an distro-skol e kumuniezhioù tolpad-kumunioù Lannuon (+45%) hag an Oriant (+20%).

Renkadur an dek kumun a zegemer ar muiañ a zeskidi + renk kumunioù pennañ Breizh - Bloavezh 2008/2009

	Kumun	Dep.	Live 1	Live 2	Live 3	Live 4	Live 5&+	4 lamm	2 lamm	Hollad	Emdroadur bloaziek
1	Roazhon	35	63	40	42	21	24	3		193	-19
2	Naoned	44	53	17	36		26			132	-34
3	Brest	29	43	22	11	14	26			116	-6
4	Pempoull	22	25	19	16	14	5			79	19
5	Montroulez	29	19	10	7	8	31			75	-4
6	An Alre	56	17	10	11	23	12			73	
7	Kemper	29	22	15		8	13	13		71	17
8	Plougerne	29	13	7	14	13	20			67	29
9	Plañvour	56	13	10	14	11	17			65	30
10	Kemperle	29	12	13	4	12	15			56	22
11	Gwened	56	22	6	13		15			56	-4
12	Sant-Brieg	22	9	9	12		25			55	23
13	Lannuon	22	22	10	8	7	5			52	19
18	Landerne	29	15	20						35	10
23	Gwenrann	44	11	8	7	7				33	-4
28	Sant-Maloù	35	7	8	5	9				29	0
37	Dinan	22	8	8	9					25	-6
38	Karaez	29	16	4	0		4			24	10
42	Douarnenez	29	15				8			23	-9
47	Pondi	56	12	9						21	-3
63	Lannarstêr	56	10	7						17	1
64	Gwengamp	22	9	5			3			17	0
88	an Oriant	56	9	4						13	
106	Redon	35	10							10	0

 Sifroù war gresk

 Sifroù war zigresk


 sifroù stabil

Mont a ra an niver a zeskidi war greskiñ pe eo stabilaet an niver-se e peder kumun diwar bemp. Stabilaet eo en unan diwar ziv hag ur c'hresk zo en unan diwar deir. Roazhon a chom ar gumun a vod ar muiañ a dud deuet a zesk brezhoneg dre ar c'hentelioù noz. Naoned eo c'hoazh an eil kumun e-keñver an niver a zeskidi daoust d'an treuzkas zo bet graet eus Naoned da Sant-Ervlan. Dilec'hiet ez eus bet kentelioù a oa aozet e Naoned warlene da Sant-Ervlan da heul krouidigezh ar greizenn Yezhoù ha Sevenadur hag a zegemer skolaj Diwan Al Liger-Atlantel.

Bras eo an niver a zeskidi e Montroulez hag e Pempoull. Muioç'h a skolidi zo eno eget e Kemper ma chom an niver a zeskidi izel pa vez keñveriet gant Brest, Roazhon pe Naoned. Kumunioù bras evel an Oriant ha Gwened a chom gant un niver a zeskidi bihan-tre c'hoazh : n'eus nemet 10 den a zesk brezhoneg en Oriant, kumun bobletañ ar Mor-Bihan da skouer. Ur framm micherel zo evit kenurzhiañ ha brudañ ar c'hentelioù eno met ne ro ket kentelioù brezhoneg. Mankout a ra ur framm micherel hag a stumm an oadourien war ar brezhoneg. Dilañs zo gant Gwened (11^{vet} kumun e-keñver an niver a oadourien a zesk brezhoneg) p'eo kumun gentañ Breizh evit an niver a skolidi divyezhek : n'eus framm micherel ebet e Gwened evit ar c'helenn d'an oadourien.


Douget eo kresk an niver a zeskidi gant ar c'hentelioù nevez digoret : un drederenn eus an deraouidi enskrivet ouzhpenn a zeu eus al lec'hioù nevez digoret en distro-skol.

Dasparzh an niver a skolidi er c'hentelioù noz- Bloavezh 2008/2009



E PESEURT LIVE EMAÑ AN DESKIDI

Dasparzh an niver a zeskidi er c'hentelioù noz dre live ha dre zepartamant -Bloavezh 2008/2009




Notenn : a-vent gant an niver a skolidi en departamant eo pep kelc'h

Damheñvel eo dasparzh an deskidi dre live en departamantoù. N'eo ket dister pouez departamantoù ar reter. Pouez an deraouidi zo aet war greskiñ e distro-skol 2008 e-keñver hini 2007 a-drugarez da zepartamant Penn-ar-Bed dreist-holl.

KENTELIOÙ SIZHUNIEK WAR AL LEC'H LABOUR : 227 GOPRAD STUMMET WAR AR BREZHONEG


War ziorren ez a ar stummadurioù war ar brezhoneg kinniget d'ar c'hopridi war o lec'h labour. Kentelioù sizhuniek a ginniger d'an dud-se. An darn vrasañ eus an implijerien a ginnig seurt stummadurioù d'o gopradi zo frammoù publik ha tiez-kêr peurvuiañ. Digoret ez eus bet kentelioù e **ti-kêr Brest** kinniget gant Sked en distro-skol-mañ da skouer : 73 goprad a gemer perzh er c'hentelioù-se. Abaoe Du 2008 ez eus bet lakaet e plas kentelioù sizhuniek e **Kuzul-rannvro Breizh** kinniget gant Skol-an-Emsav ivez.

Ur pal disheñvel zo gant ar c'hentelioù brezhoneg-se kinniget war al lec'h labour eus hini ar c'hentelioù noz boutin hag a zo muioc'h un obererezh dudi. **Diorren plas ar brezhoneg er vuhez foran a c'haller gortoz eus ar stummadurioù-se.**



STAJOÙ AR C'HINNIG STAJOÙ

Pelec'h emañ al lec'hioù staj - distro-skol 2008



AR GOULENN STAJOÙ : AN NIVER A OADOURIEN O DOA HEULIET STAJOÙ E-KERZH AR BLOAVEZH 2007/2008

An niver a stajidi dre zepartamant dre padelezh ar staj -bloavezh 2007/2008

	Stajoù hir	Stajoù ur sizhunvezh	Stajoù dibenn-sizhun	HOLLAD	Kresk bloaziek
Aodoù-an-Arvor	0	72	101	173	-77
Penn-ar-Bed	80	426	100	606	22
Il-ha-Gwilen	20	37	45	102	-28
Liger-Atlantel	0	3	95	98	0
Mor-Bihan	23	65	71	159	-19
BREIZH	123	603	412	1138	-102
Emdroadur bloaziek	-8	-44	-50	-102	



Sifroù war gresk



Sifroù war zigresk



sifroù stabil

Un digresk hollek zo en niver a stajidi o deus heuliet stajoù e-kerzh ar bloavezh 2007/2008. Brasoc'h eo an digresk e touez stajidi stajoù dibenn-sizhun c'hoazh. N'eo ket diorroet kement ar stajoù dibenn-sizhun hag ar stajoù all e Penn-ar-Bed. N'eus ket kement a lañs gant seurt stajoù en departamant-se hag en departamantoù all : ar memes niver a dud deuet o deus heuliet stajoù dibenn-sizhun e Penn-ar-Bed hag en Aodoù-an-Arvor pe el Liger-Atlantel da skouer. Digresket eo bet an niver a stajidi en Aodoù-an-Arvor (koulz e stajoù ur sizhunvezh hag er stajoù dibenn-sizhun) hag en Il-ha-Gwilen (un digresk en niver a stajidi ur sizhunvezh). Mont a ra an niver a stajidi er stajoù daoulamm un tamm war greskiñ en Il-ha-Gwilen.

Renkadur ar broioù diouzh an niver a stajidi - bloavezh 2007/2008

	Stajoù hir	Stajoù ur sizhunvezh	Stajoù dibenn-sizhun	HOLLAD	Kresk bloaziek
B.Vrest	58	191	46	295	64
B.Kornôg Kreiz Breizh	22	165	21	208	142
B.Wengamp		72	101	173	-74
B.Roazhon	20	37	45	102	-28
B.Gerne		61	33	94	-187
B.an Oriant	23	46	16	85	6
B.ar Briver			50	50	-5
B.Bondi		19	30	49	
B.Naoned		3	45	48	6
B.Kêr-Wened			14	14	
B.an Alre			11	11	
B.Vontroulez		9		9	3
BREIZH	123	603	412	1138	



Sifroù war gresk





Sifroù war zigresk



sifroù stabil

Bro Vrest eo ar vro a vod ar muiañ a stajidi koulz evit stajidi ar stajoù hir ha stajidi ur sizhunvezh. Er vro-se emañ staliet Stumdi ar framm a stumm ar muiañ a dud dre stajoù. Disheñvel eo renkadur ar broioù hervez an niver a stajidi dibenn-sizhun : bro Wengamp a zegemer ar muiañ a stajidi gant ar badelezh-se a-drugarez d'ar framm Studi ha Dudi staliet eno. Muioc'h a stajidi zo bet oc'h heuliañ stajoù dibenn-sizhun e bro ar Briver eget e bro Vrest pe e bro Gerne avat ar pezh a ziskouez eo stank-distank ar c'hinnig . Ul lamm zo bet graet gant bro Kornôg Kreiz-Breizh e-kerzh ar bloavezh 2007/2008 a-drugarez da stajoù KEAV dalc'het e Lopereg abaoe 2007. Er c'hontrol eo bet digresket an niver a stajidi e bro Gerne ma veze aozet ar stajoù-se betek-henn.

Dasparzh ar stajidi diouzh padelezh ar staj dre vro -bloavezh 2007/2008



AR C'HELENN DRE LIZHER


350 den a zesk brezhoneg dre lizher kinniget gant 3 framm. 90% eus ar skolidi-se a heuilh ar c'hentelioù kinniget gant Skol Ober. An tri chard eus an deskidi zo deraouidi. Diorroet e c'hall bezañ ar c'heleñn-se dre an deskerezh enlinenn. N'eo ket diorroet mat an doare kelenn-se evit ar brezhoneg c'hoazh.

AR GELENNERIEN

Tost da 250 kelenner a ra war dro ar c'heleñn brezhoneg d'an oadourien. An hanter anezho zo kelennerien a-youl-vat. Un drederenn eus ar gelennerien a vez digollet evit reiñ kentelioù brezhoneg. N'eus nemet an darn vihanañ a zo kelennerien a vicher ha postoù darnamzer eo evit darn anezho. E Penn-ar-Bed emañ an niver a gelennerien a vicher en e uhelañ.

Dasparzh ar gelennerien diouzh o statud dre zepartamant Bloavezh 2008/2009

	Gopret	Digollet	A-youl vat	HOLLAD
Aodoù-an-Arvor	3	14	27	44
Penn-ar-Bed	22	34	23	79
Il-ha-Gwilen	3	16	7	26
Liger-Atlantel	3	7	24	34
Mor-Bihan	3	18	40	61
BREIZH	34	89	121	244





Notenn : a-vent gant an niver a gelennerien en departamant eo pep kelc'h

Frammetoc'h eo ar c'helenn d'an oadourien e Penn-ar-Bed hag en Il-ha-Gwilen evit ar pezh a denn da statud ar gelennerien. An darn vrasañ eus ar gelennerien zo digollet. Ur mont-en-dro kevredigezheloc'h zo gant Aodoù-an-Arvor, ar Mor-Bihan hag al Liger-Atlantel avat p'emañ an darn vrasañ eus ar gelennerien a-youl vat.

ROUEDAD DAO

Feur an deskidi stag ouzh rouedad Dao en niver hollek a zeskidi dre zepartamant



An div drederenn eus skolidi ar c'hentelioù noz zo stag ouzh rouedad DAO : heuliañ a reont kentelioù kinniget gant ur framm ezel war-eeun eus DAO pe e heuliont kentelioù aozet gant rouedad ur framm ezel eus DAO. Frammoù Penn-ar-Bed zo aet ar pellañ e rouedad DAO : tost pevar skoliad diwar bemp zo liammet ouzh rouedad DAO en departamant-se. An departamant zo aet ar pellañ er micherelaat eo ivez. Ar skouer kontrol eo ar Mor-Bihan : n'eus nemet un drederenn eus ar skolidi zo liammet ouzh rouedad DAO hag an departamant n'eo ket aet war-du ar micherelaat.

PRIZIAÑ LIVE YEZH AN DESKIDI GANT DAO

432 deskard zo bet priziet o live yezh e 2008 ha 412 anezho o deus bet un diplom. Daougementet eo bet an niver a zeskidi priziet e-keñver 2007 pa oa bet priziet 198 deskard. Bihan eo kenfeur an deskidi zo priziet o live yezh (15% eus an deskidi) met n'eo nemet an eil bloavezh eo lakaet war sav ha kresket kalz eo e-keñver warlene.

Splann eo kresk an niver a zeskidi er c'hentelioù noz e distro-skol 2008. Tuadur an distro-skol diwezhañ zo kadarnaet ha gwellaet zoken : en tu all d'an harz d'an digresk a oa bet stadet warlene ez a an niver a zeskidi war greskiñ en-dro da heul dek vloaz a zigresk. Mat-kenañ eo kresk an niver a dud a grog gant ar brezhoneg en distro-skol-mañ : 10% ouzhpenn a zeraouidi zo en distro-skol-mañ eget warlene. Disoc'h ar politikerezh diorren zo bet lakaet e pleustr e Penn-ar-Bed hag e bro Gerne en resis eo an tuadur-se, da lavaret eo labour Mervent hag he deus strivet evit digeriñ lec'hioù nevez. Douget eo kresk live an deraouidi gant al lec'hioù-se : tost un drederenn eus kresk al live 1 zo deuet dre ar c'hentelioù digoret.

Dreistpouez Penn-ar-Bed zo kadarnaet gant an distro-skol-mañ. Douget eo ar c'hresk el liveoù kentañ gantañ. Goloet mat eo ar vro-se gant ar c'hentelioù brezhoneg. Eno emañ frammoù micherel brasañ ar c'helenn brezhoneg d'an oadourien : skolidi Mervent ha Sked a dalvez an div drederenn eus holl zeskidi Penn-ar-Bed. Dont a ra mat war wel efedusted al labour frammañ en departamant-se. Kreñvaet eo dreistpouez an departamant gant an diouer a ginnig zo en Aodoù-an-Arvor hag er Mor-Bihan. N'eo ket ken frammet ar c'helenn en daou zepartamant-se. N'eus nemet un hanter eus departamant Aodoù-an-Arvor zo goloet mat. Ha mat-kenañ eo bet an distro-skol er c'hentelioù kinniget el lodenn zo pourvezet : feur kresk brasañ an departamantoù eo hini Aodoù-an-Arvor (+15%, gant ur c'hresk el liveoù uhelañ dreist-holl). Toulloù bras hep kinnig ebet a chom er Mor-Bihan ivez. Un diouer a frammañ a verzer en departamant-se. Lec'hioù hag a zo lañs ganto evit ar pezh a denn d'ar c'helenn divyezhek zo treut e-keñver ar c'helenn d'an oadourien evel Gwened, Pondi pe Lannarstêr da skouer. N'eus nemet 10 den a zesk brezhoneg e kumun bobletañ an departamant, en Oriant. Peadra zo en daou zepartamant-se da ziorren ar c'hinnig ha da stummañ muioc'h a vrezhonegerien.

N'eus ket bet lakaet un harz d'an digresk hollek en niver a zeskidi en Il-ha-Gwilen c'hoazh : un digresk bihan zo en distro-skol. Stabilaet eo an niver a zeraouidi memes tra en distro-skol-mañ. Digresk al Liger-Atlantel a zeu eus diaestaerioù e frammadur ar c'hinnig. N'eus ket bet kinniget en-dro kentelioù zo e kornôg an departamant da skouer. Douget eo ar c'helenn gant tud a-youl-vat abalamour d'an diouer a ober eus tu ar galloudoù foran. Dilañs zo bet gant an niver a oadourien o deus heuliet stajoù e-kerzh ar bloavezh 2007/2008. Er stajoù dibenn-sizhun eo bet an digresk brasañ. Stabil eo an niver a yezherien zo bet stummet dre ar stajoù hir avat. Stummadurioù gant doareoù nevez a vez kinniget gant ar frammoù micherel a ginnig stummadurioù dibaouez : kentelioù sizhuniek kinniget d'ar c'hopriddi war o lec'h labour. Gopriddi frammoù foran (tiez-kêr, Kuzulioù-departamant, Kuzul-rannvro Breizh) a denn splet eus seurt kentelioù evit an darn vrasañ anezho. Kizidikaet eo ar gargiddi d'ar brezhoneg dre ar stummadurioù-se. Gallout a reer gortoz e c'hallfe mont implij ar brezhoneg war ziorren er vuhez foran dre ar stummadurioù-se.